

Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

12 Lur

bremañ

MAE 1987 Niv. 68

l'ar 16 a viz mae 87

Montroulez

Sal AUREGAN / 14 eur



KLASK'ZO WAR

Bodadeg
etrevroadel
evit **DIWAN**

MONORY REN
N^o 1532

LIZHIRI

Intereset bras on bet gant niverenn Bremañ mis Ebrel, kavout a veer e-barzh e-leizh a bennadoù a zo danevelloù ha testennoù. An dra-se eo, a gaw din, a rank bezan ur gazetenn. Dedennet eo bet va evezh en un doare ispiatal gant pennad Fulup Kloareg diwar-benn "Brougou hollek ar studierien" a oa bet dalc'het e Paris. Ur seurt testi, diwar-benn un darvoud re-sis, diwar-benn ar c'hudennoù a zo bet da sevel ur gomiston evit ar yezhoù gwasket a zo kant kwech plijusoc'h, ha talvoudusoc'h eget nouspet presegem pe disklariadur. Diskouez a ra ivez penaos e c'heller la-kaat ar c'hudennoù da sevel o kemer perzh e lec'h-mañ-lec'h, ha pa ve gant nebeut a dud : dav eo bezan ar lec'h, el lec'h mat pa vez ret.

C'hoant em defe ivez lavaret da Hervez ar Beg ez on a-da gentañ kant-dre-gant pa lak ar beo'h war "sibaboù politikel Paris" a zo kaoz da wiskerezh hor yezh. N'eo ket kulpabilitezh ar vrezhonegerien a zo d'ober, met ar re a zo enebet outo. Padal, ne vo ket kement-se an diskoù. N'eo ket Paris a gae-vesteo hor yezh, met ni. Neuse, lavaromp sklaer hepred n'eo ket ohom da glenn pe gromzet a cheñcho tra pe dra. Lavaromp ez

Da Aotrou Renier Bremañ
N'on tamm ebet boaset da respont da gement a vez skrivet diwar va fenn er c'helaouennou. Met peogwir ho-peus c'hoi roet da intent d'ho lennerien ne ouzom ket pet favenn a zo ret d'ober na, e Karfen evelkent reisaat an traoù evel-hen, di-war ar bandennoù hag a bedan ac'hanoc'h da zont da selaou, ma karit :

-p'am eus rentet kont deus devezhiad Karaez an 22 a viz Meurzh e-pad keleier galleg an deiz war-lepoc'h war FR3, n'em eus komset nemet deus ar Sul, hag anet e oa. Hag em eus laret e oa bet "plus de 2.000 personnes".

-p'am eus rentet kont deus devezhiad an 21 hag an 22 a viz Meurzh, e-pad keleier "An Taol Lagad", eizhetz da c'houde, em eus displeget e oa bet "1.500 a dud er Fest-noz, d'ar sadorn, etre 2 ha 3.000 er gowel d'ar Sul".

Ne gav ket din e ve kontrol an eil renta-kont hag egi-

eus romantoù da sevel, filmoù da grouiñ, kanaouennoù da ganañ arc'hant da gavout, bugale da sevel, kargoù (er c'huzulioù-kêr, er vuhez kevredigezhel) da gemer...

Lavaromp se, rak se eo ar g'wirvoud. Epeeljust, n'hell ket pep hini ober pep tra. Met roll an Emsav eo diskouez an hent a zo da gemer, mont war gement tachenn gevredigezhel a zo, broudañ an dud ha reiñ dezho binotoù d'hen ober. Goulenomp ha goulenomp groms e vefe dou- jet ouzh hor g'wirvoud. Met la-kaomp anezho er pleustr da gen- tañ.

Kemeromp ur skouer : la-kaomp e c'hellfe FR3 pe ar rann- vro sevel ur steuñ evit stum- mañ brezhonegerien ha sevel 'benn daou vloaz ur stadenn de- le vrezhonek. Neuse e c'hou- lemjen diouzhtu. N'eo ket po- ssi, pa ne ve ken evit abegoù politikel. Neuse, ur seurt steuñ, n'eo nemet an Emsav a vefe gouest da sevel anezhañ, ha rankout a rafe studiañ et e- unan penaos kontennoù a zo da bleustriñ evit tizhout ur seurt pal. Ret eo dere-hel kont eus ar fedoù. Na gasomp ket an dud war hentoù dall. Diskouezomp kentoc'h ar pezh a zo d'ober.

Tangy Louarn (Kemper)

Hervez em eus lennet e- barzh BREMAN ne vije bet tamm galleg ebet war al leurenn e Gowel Karaez. Evel meur a hini avat em boa klevet paotr DIWAN o tistagañ ur brezegenn c'hall- lek. Petra zo da grediñ ? Hon divskouarnioù pe bennad Yann Pennhalleg ? Gouzout a ran e klasked ohom hep komz eus traoù displejuz : n'eo ket an digarez da gubat ar wirionez avat.

Hervez Morvan, (Roazon)

Kenroudi ker,

Kavet em eus ho gazetenn e stal levr-ioù "Kornog". Plijet on bet o welet e oa seurt kaze- rennoù penn da benn e brezhoneg. Domaj eo ne vefe ket anavezet ha kavet e lec'hioù re-sis ne- metken. Mont a ran da Vontrou- lez gwech ha gwech ha dre zi- gouezh eo em eus kavet BREMAN. Desket em eus ur bern traoù en 2 niverenn em eus prenet. Ha se zo a-bouez evidon, lenn Keleier va bro e brezhoneg.

Gant ma talc'ho BREMAN da vont war-raok ha va gweleñ goure-hemennoù da skipailh ka- lonek ar gazetenn-mañ.

Patrig Perroud.

tri. Set ne glo ket ken gant an doare m'eo ingalet ar skipailh. Kement ha moulañ poltre- joù, koulz deoc'h klask ne ve- fent ket re gosh... Evit se, ar- vat, e vefe mat deoc'h tennañ reoù all, ha soñjal dont war- dro da vat ur wech bernaket. Ma fellfe deoc'h dont, e vefen-me laouen o tigemer ac'hanoc'h se zo sklaer.

Gant ma gouro-hemennoù, Fanch Broudig (Brest).

Trugarez da Fanch Broudig evit e bedadenn. Gwir eo ne rafe ket droug d'ar gelaouenn adnevezñ he fotoioù gwech ha gwech all met klasket vez ober !...

Anzav a reomp e oa set un tamm priñ hon c'henlabourer en e gontoù o veskañ ar pezh a oa bet laret war ar Sul gant ren- taou-kont an dibenn-sizhun en e bezh. Ra viñ pardonet.

Skipailh Bremañ.

DIWAN

MANIFESTADEG ETREVROADEL

KALETAAT A RA STOURM DIWAN


Gant manifestadeg Montrou- lez e sav DIWAN an derez zenn- stoura evit difenn he buhez. Ne vo ket ar Vretoned o- unan. Dont a raio ganto person- nezhioù etrevroadel da zifenn o gwir ar Vretoned da ziorren o yezh hag ar sistem deskadurezh kaset en-dro gant DIWAN.

N'hell difenner ar bre- zhoneg ebet c'hvitañ war ar ge- jadenn veur n'eus bet biskoazh anezhi e gwirionez e Breizh er- mod-se etre ar Vretoned kar-o- yezh hag ar re a harp anezho en diavaez. Da gentañ penn e vo an Aotrou MAHER, Iwerzhonad, depu- tant Parlament Europa ha Prezi- dant bodad an Deputeed karget eus ar yezhoù minorizet. An Aot- rou Jack MACARTHUR, ezel eus kuzul rannvro an Highlands e Bro-Skos a zeuio evel Prezidant nevez burev Europa ar Yezhoù Minorizet. Gilbert DALGALIAN a gomo en anv ar CMIEB, Kreizenn Bed ar C'helaouñ diwar-benn an Deskadurezh Divyezhek. Joaquim ARENAS, en anv Generalitat Ka- talogna, karget eus deskadurezh ar c'hatalaneg er skolioù hag ar skolioù katalaneg a c'hello displegañ talvoudegezh ar poli- tikerezh kaset en-dro en e vro. Nathalie NOWIK, hi, a vo aze en anv ar C'huzul Etrevroadel Evit Difenn ar Brezhoneg, skourr ar Stadoù-Unanet.

Bretoned a vo ivez o ke- mer ar gomz eveljust : an Ao. Kleac'h, maer Montroulez, an I- tron Simone de Bollardière evit Kuzul Skoazell Diwan, Per- yvon Tremel, Prezidant an dil- lennidi brezhoneger, ha dilen- nidi all c'hoazh, kuzul Sevena- dured Breizh, ...

An holl zeputeed, sena- tourien, kuzulierien rannvro, kuzulierien departamant, maered ar c'harioù e-lec'h ma 'z eus skolioù DIWAN a zo bet pedet. Gwelout a raio e-giz-se difen- nerien ar yezh piv a zo prest d'o skoazellañ.

UN DISKOULL MALLUS
Gwir eo ez eo mallus bre- mañ kavout un diskoù. Resevet eo bet o lizher dizimplijout gant 54 implijad Diwan abaoe hanter miz Ebrel. E kreiz miz Mezheven e vint er-maez da vat.



MONORY RENE N° 1532

ROLL AN DEVEZH

- 11 e 30 Pennad-kaoz etre ar brezegerien hag ar gelaouenne- rien - (Ostaleri Europa) -
- 2 eur Film video war an div- yezhegezh savet e-pad kendiviz Landerne (1985) war ur skramm bras.
- 3 eur Prezegennoù gant : Maer Montroulez, DIWAN, Kevredigezh an dilennidi vrezhonek (P.Yvon Tremel, kuzulier departamant Aodou an Hanternoz), Kuzul Se- venadured Breizh, Gilbert DAL- GALIAN, eil prezidant Kreizenn kelaouñ evit an Deskadurezh

- Divyezhek er Bed. -Ha Nathalie NOWIK, dileuriadez Komite Etrevroadel evit Difenn ar Brezhoneg. -Joaquim ARENAS, karget eus rann kelennadurezh ar c'hatala- neg e gouarnamant Katalonia. -M.MAHER, depute Europa, prezi- dant komision parlament Europa dant komision parlament Europa dant eus ar yezhoù minorle- zet. -Jack MACARTHUR, Prezidant Bu- rev Europa ar Yezhoù Minorle- zet stag ouzh Komision Europa. -Simone de BOLLARDIERE, prezi- dantez Komite Skoazell DIWAN. -Dilennidi Breizh.

DIWAN

MANIFESTADEG ETREVROADEL

Ema an holl koulz lavarout o tifenn Diwan e Breizh koulskoude : A-unvouezh eo bet votet mennadoù harpañ gant ar c'huzul-rannvro, gant kuzulioù departamantoù Aodoù-an-Hanternoz ha Penn-ar-Bed. Kêrioù evel Sant-Malo, Lannuon, Karaez, Douarenez hag all... o deus graet kemend-all. Chom a ra avat, Ministr an Deskadurezh hag ar gouarnamant sonnet en o menez : reiñ an nebeutañ a blas posubl d'ar brezhoneg hag ar muiañ posubl d'ar galleg.

RESPONT AR MINISTER

Skouerius kenañ eo respont Ministr an Deskadurezh graet d'ar 16 a viz Ebrel : da gentañ, kelenn ar galleg e-giz ma 'z eo merket e-barzh program ma CHEVENEMENT, da lavarout eo un drederenn eus an amzer. En amzer a chom e vefe moaien da welet peserit plas reiñ d'ar brezhoneg. War a seblant, ne fell ket d'ar ministr kompren ez eus un diforc'h etre kelenn en ur yezh ha kelenn ur yezh. Met bravoc'h c'hoazh eo e glevout oc'h ouzhpennañ : "Il ne saurait être question pour l'Etat de contribuer au financement d'écoles dans lesquelles les chances et des moyens de pouvoir, à l'égal des autres enfants scolarisés dans les écoles publiques ou privées sous contrat, préparer leur avenir au même titre et dans les mêmes conditions que tous les autres petits français". Setu ta Bro-C'hall trevadennel o tiskouez en-dro beg-e-fri.

EMVOD PARIS

Dileuridi DIWAN hag an dilennidi a oa aet da b-PARIS d'ar Meurzh 21, an Aotrouezh COZAN, JARRY, Le PROHON hag ARZEL o deus gellet ober o sonj. Deut int en-dro eus Ministr an Deskadurezh hep na ve set an doser an disterañ war-raok. Ha mennet e vint da vont pelloc'h brezañ ? Daoust hag eñ e vo ur gejadenn all etre Prezidant rannvro Breizh ha dilennidi all hag ar Ministr an Aotrou MONORY -Setu ar pezh a c'hortoz-

Anat eo neuze ar pouez a vo gant manifestadeg DIWAN e Montroulez. Seul vuioch a dud, seul greñvoc'h e vo dileuridi Breizh evit pouezañ war ar gouarnamant. Ne vo ket an deiz na da vont da besketa, na da dou-

zañ letonenn ar jardin, me 'lar deoc'h. Ha ne vo ket trist an abardaez peogwir e echuo gant ur mell FEST NOZ kaset en-dro gant ar BLEIZI RUZ.

L.ar B.



Kuzul Skoazell DIWAN Kemper a gendalc'h da stourm evit e chomfe bev ar skolioù divyezhek DIWAN. Aloubet eo bet ganto Ti-Kêr Kemper d'ar Sadorn 9 a viz Mae. Marc BECAM, senatour-maer Kemper, a oa dres oc'h ober ur brezegenn diwar-benn kentstrivadeg pe koñkour ar "c'hêrioù e bleuñv" dirak an toullad mat a Vretoned interestet gant ar fleur. Chalet bras eo bet an aotrou BECAM o vezañ direnket e-kreiz e benn-kaoz, kement hag en deus laret d'e sekretour mont da laret d'an "alouberien" e reseve anezho kerkent hag e vije libr.

Ar pezh en deus graet en ur resev un 30 anezho un tamm diwezhatoc'h. Tud Diwan Kemper, avat, ne oant ket deuet da selaou prezegennoù kaer e-giz amatourien ar fleur ; evit goul ar pezh en doa graet pe ar pezh a rae evit ar skolioù DIWAN, ne laran ket. Klasket en deus ar senatour, en em zifenn o laret ez eo bet degemeret mat atav skol DIWAN Kemper er C'huzul Kêr hag he deus bet bloaz yalc'hadoù digantañ.

"Met, petra 'rit evit e cheñchfe an traoù e Paris? Da betra servij reiñ un nebeut a are'hant da skol Diwan Kemper na vo skarzhet ar skolaerien ? " a c'houlas tud Diwan Kemper. E-giz n'en deus graet netra betek 'hen eo bet lakaet diaes aze an aotrou BECAM. Prometet en deus e pellgomzfe d'al Lun war-lerc'h da Vinistrerezh an Deskadurezh-Stad evit pouezañ war-du DIWAN.

Setu aze un doare dispar da zaremprediñ hon dilennidi. Goul ganto sklaer ar pezh a reont, ar pezh emaint o sonj ober evit renkañ ar c'hudennoù a denn ouzomp, ni, voterien ; ha goude barn anezho war an disorc'hoù. Tud komite skoazell DIWAN Kemper o deus diskouezet aze an hent da gemer.

D.J.

DIWAN

SADORN 16 A VIZ MAE

SKUIZHAN AN DUD

SED AZE POLITIKEREZH AR STAD

1977-1983 : Ar stad c'hall he deus bet ezhomm 6 bloaz da zegemerout skolioù DIWAN : e 1983 ez eo bet savet ur c'hevrad etre ministr A. SAUVARY hag 11 skol DIWAN.

1985-1986 : Ar c'hevrad-se n'en doa diazez ebet e-keñver lezenn. Ouzhpenn-se ne zegase nemet nebeut a are'hant d'ar skolioù da vont en-dro. Ken nebeut ma 'z eo bet set da J.P. CHEVENEMENT studiañ ha kinnig e 1985, kenstagan 31 mest-skol hag o c'hasoù ouzh ar servij publik a zeskadurezh, e-giz taot-arnod da c'hortoz ma vefent degemeret da vat.

1986 : Daoust da R. MONORY chom hep bezañ a-du gant ur seurt takties, ar ministr nevez a asant reiñ are'hant da gentañ evit ar postoù n'int ket bet kenstaget ouzh ar servij publik. Kinnig a raio 6 miz warlec'h, e miz Du 1986 ur takties all evit kenstagan, n'eo ket 31 met 12 skolaer. Ar ginnig-se a chomo ur ginnig hepken. Etentret, sonj ar ministr a zo bet cheñchet : ar c'hevradoù ptevez a veje aesoc'h, evit toste da lakaat er pleust.

Ha koulskoude e welet hitiv n'eo bet diskoulmet netra war ar fons : ar stad a fell dezhi tertiñ sistem kelenn DIWAN diazezet war an unyezhegezh en eil yezh er skol vamm hag er C.P.

Ar sistem-se, par d'ar te a zo bet lakaet en o sav, dielfennet ha testet war un niver bras a vugale, koulz tramot (Kanada, Kebek) hag en Eutopa (Kembre, Katalonia, Euskadi) a zo heñvez spesialised an deskadurezh divyezhek an hini egedusañ evit dont da gaout un divyezhegezh kempouezet mat abred.

N'heller ket chom hep gueleit ken nebeut pe hini eo politikerzh Eutopa hitiv, koulz war tu diroen an divyezhegezh er skol ha war tu ledanaat implij ar yezhoù binanaet.

Evit lakaat ar Stad C'hall da zoujañ euzh seurt fedoù fetsis eo e vez aozet ur meeting etrevroadel hag ur vanifestadeg gant DIWAN e Montroulez d'ar 16 a viz Mae (sal Autegan, adal 2 eur g.m.)


En tu all d'ar fedoù-se, DIWAN a zo evez ar chais davezhian ha nemeti matreze hon dije da reiñ d'ar brezhoneg toud e bias er vizez penderiz...

KEN E RANKER MONT AN NIVERUSAN POSUPL D'AR 16 A VIZ MAE DA V-MONTRROULEZ

MANSONERIEN DIWAN KEMPER

Dorioù Encellerzh Akademikel Kemper a zo bet stanket gant brik e-pad an noz Disul 3 a viz Mae 1987. 3 devezh arak, d'an 30 a viz Ebrel e kase Jack LANG ul lizher da CHIRAC evit lavared dezhañ ober kement hag a zo ret evit savestañ skolioù DIWAN ha da vodañ Kuzul Broadel Yezhoù ha Kulturioù ar Rannvroioù.

J.K.



MONTRROULEZ

**2^e PREZEGENNOU
6^e MANIFESTADEG
8^e ABADENN ROCK
9^e BLEIZI RUZ**

bremañ 5

PENNAD-KAOZ GANT

JACK MACARTHUR

PREZIDANT BUREV EUROPA



ouet gant renevezh an Europ ?
J.M. Tro hon eus alies da reiñ kuzulioù evit pezh a sell ouz ar yezhoù minorizet en deskadurezh, er media hag all. Hon pal eo lakaat degemer ul lezenn-stur evit ar yezhoù minorizet gant ar G.E.E. ul lezenn a dalvezfe evit an 12 BRD. Ar gudenn pennañ eo an deskadurezh ha pouezañ a reomp evit ma vije roet o flas d'an holl yezhoù en holl stadoù eus ar Gumuniezh.

Bremañ Daoust hag eñ peus d'ober gant ar Parlamant Europat ?

J.M. Roif a reomp alioù pa zo emvoudoù gant an deputeed, dreist-holl e kuzul kulturel ar Parlamant. E pep bro zo deputeed e strolladoù disheñvel a zo tomm diouzhomp hag a zifenn gwirioù ar yezhoù minorizet. Met ar Parlamant e-unan n'eus ket ur bern galloudoù evit c'hoazh setu n'hell rediañ stad ebet da heuliañ e zivizoù.

Bremañ Daoust hag eñ e vez roet an tu deoc'h d'ober ho labour e-giz ma kirit ?

J.M. N'heller ket laret an dra-se eveljust. Dre an arc'hant eo e c'hell ar c'homision brasaat pe zisteraat hon plas. Dibae ar penn kentañ budjet ar burev zo bet seizhkemented. Ar pezh a zo a-bouez eo al linenn ispisial er budjet european hon eus bremañ. Ar pal eveljust a vije gellat implij holl yezhoù Europa er Parlamant, met pell emañ c'hoazh Yann eus e gazek.

Bremañ E 1992 gant an Europ o tom da vir. Hag aeooc'h e vo evit ar yezhoù nam ofisiel eus an 12 bro ?

J.M. 1992 an dra-se sinifi e vo unvanet muioc'h ar Stadoù deus an Europ, hervez ar pouez a vo roet d'ar rannvroioù e vo mat pe fall evidomp. Ma talv an unvanidigezh, muioc'h a c'halloud kreiz evit Brussels, aon zo da gaut. Mag e c'hell Renevezh an Europ labourat war eun gant ar rannvroioù e vo ur c'hañs evit reiñ lusk en dro d'ar broioù, pell eus kreiz an Europ.

Anat eo deomp ne vo dalc'het o yezhoù hag o grizioù

Bremañ Daoust hag eñ oc'h sela-

Kemeret en deus perzh Jack MacArthur e-barzh Gouel ar Sinema hag ar Chadennoù tele deus ar Broioù Keltiek en Inverness, en e vro, e penn kentañ miz Ebrel. Kejet an deus e-giz-se gant ar gelaouennierien Vreton a oa eno ha lavaret en deus e teufe ez ofisiel en anv ar Burev Europat da MEETING DIWAN e Montroulez d'ar 16 a viz Mae. Setu digarez d'ober muioc'h anaoudegezh gantañ.

Bremañ : Pensaos e teuer da vezañ Prezidant Burev an Europ evit ar yezhoù minorizet ?

J.M. Da gentañ ur ger diwar-benn ar burev. Ennañ e kaver dileuridi eus an holl bobloù a ra gant ur yezh disheñvel diouzh yezhoù ofisiel an Europ. E-giz-se m'eus bet tro da labourat e-barzh, en anv Bro Skos hag he yezh, ar gouezeleg. Kargoù m' eus anañ peogwir on Pre-

zidant Kevredigezh ar Gouezeleg ha Prezidant ar Gevredigezh evit kelenn ar gouezeleg en Highland, hag ezel eus Kuzul Rannvro an Highlands. Bep bloaz e voter evit Prezidant ar Burev hag ar bloaz-mañ eo deut an e-nor-se din, warlerc'h Aureli Argemi ar C'hatalan a oa ara-zon.

Bremañ Petra eo labour ar burev ?

J.M. Dibae 10 vloaz, ar burev en deus labourat war deir dachenn : lakaat kejañ ar re a labour evit ar yezhoù minorizet dre sevel kendivizoù, lakaat studiañ stad ar yezhoù gant tud yaouank eus ar broioù all. Roet vez yalc'hadou dezho da vont da veajiñ er broioù all. Trede tra labourat gant komision meur an Europ evit reiñ alioù war bolitikezh ar yezhoù bihan.

AR YEZHOU MINORIZET

netet gant ar bobloù a ouio kreñvaat o ekonomiezh. Ma ne ra ket an Europ ur striv da sikour ar bobloù divyezhek ne vo mui netet Gouelaned o komz ar yezhoù "bihan".

Dav kompren e klask muioc'h mui an douristed al lec'hioù disheñvel. Ha n'eus nemet gant ur sevenadur dibar e c'heller reiñ ul liv disheñvel d'ur vro.

Bremañ Petra soñjit deus plas ar yezhoù keltiek e gouel ar Sinema hag ar chadennoù tele en Inverness ?

J.M. 27 % eus ar filmoù a zo en ur yezh keltiek. N'eo ket trawalc'h. An tele hag ar sinema a zo a-bouez bras evit dazont ar yezhoù. Ha gouest int da vezañ enebourien vrasañ ar yezhoù minorizet. A-du krenn on gant mennoz ar gejadeg-mañ rak dre eskema programoù e vo tu d'an teleoù sevel abadennoù a dal-

voudegezh e yezh o bro.

Bremañ Dont a rit d'ar 16 a viz Mae e Breiz evit Bodadeg Etre-vroadel Diwan. Penak ?

J.M. Dont a rin da gentañ e anv ar Burev European evit lavar d'ar vrezhonegerien n'int ket o-unan gant o stourm evit o yezh. Sikour an holl bobloù minorizet a reomp ha c'hoant bras 'm eus ivez kejañ gant Bretoned peogwir n'on bet morse da Vreizh ha n'avezean ket mat a-walc'h kudenn ar yezh er vro.

Un dra am eus da laret evit echuiñ. O selaou tud ez eus da grediñ ez eus pobloù o deus gounezet hag ar re all eo echu ganto. N'eo ket gwir kement-se. Morse n'heller laret eo gounezet da vat gant ar bobl-mañ-pobl. Ur cheñchamant politikel a c'hell diskar pep tra. Stourm a reer a-enep kantvedoù.

BUREV BREIZH AR YEZHOU MINORIZET / KENURZHIEREZH SEVENADUREL BREIZH - Oaled DIWAN - TREGLONOÙ 29214 - LANNILIZ

Bretaehne Galsese -Egloez Breiz Kuzul ar Brezhoneg-Skol An Emsav - Diwan - Ar Falz - Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg-Sonerien ha kanerierien Vreizh - Unvaniezh ar Studierien Vreizh-Stourm ar Brezhoneg - Association des Etudiants de Gallo-Association des Enseignants de Gallo-APLB/KDLP - Ar gellennerien Vrezhoneg Brest - Dastum-Kendalc'h - Dalc'homp soñj - Bodadeg ar Sonerien 6

BUREV STAD C'HALL : Prezidant Joan Dorandeu - 42 rue de la Procession - 75015 - Paris - Sekretouriezh : A.V. Chapalain 16 straed Paul Borossi KEMPER

BRETONED E KATALONIA

UR VEAJ STUDI GANT AR STROLLADOU SEVENADUREL



Un dek bennak a gevredigezhioù sevenadurel a zo aet d'ober ur veaj-studi e Katalonia etre an 20 hag ar 26 a viz Ebrel.

Gant tud MJC Douarnenez e oa bet roet lañs d'ar veaj. Goude gouel filmoù ar bloaz pa-seet bet gouestlet da Katalonia e oa bet soñjet e oa un dra vat

derc'hel startoc'h an darempredoù bet skoulmet e Douarnenez.

D'ar memes mare e oa aet un toullad tud e karg en o fenn Yvon Bourges prezidant Kuzul Breizh da c'hlaourenniñ dirak pinvidigezh buhez sevenadurel Katalonia. Darempredoù zo bet kemeret ivez war dachenn an douristelezh.

Avi a c'helle kaout ar Vretoned o welet an arc'hant a vez laketaet gant Katalaniz da zifenn o sevenadur ha n'eo ket nemet evit ar pezh a sell ouz TV3, ar chadenn tele katalanek. Ar pezh a zo bet rekerket ar muiañ eo an ti-bank "La Caixa de Pension" a skozzell kalz ar grouerien e Katalonia. Gant ma c'hellou lakaat ar Vretoned da dremen eus ar bannañ d'an ober...



AFRIKA AR C'HREISTEIZ

UR VOTADEG EVIT NETRA

HA KASET E VO AN DRAJEDIENN BETEK PENN?



Araok na vefe tremenet ar voterien er burevioù-votiñ e oa gouezet e chom -fe Botha e penn an traoù. Abaoe 38 bloaz emañ ar Strollad Broadel (N.P.) o ren war Afrika ar C'hreisteiz en desped da vouezhoù ar muiañ-niver ha re ar broioù all.

Ne oa ket dleet da P. Botha kinnig ur votadeg d'ar re wenn a-raok 1989 d'ar mare ma vo galvet da votiñ an dud mesket o gouennoù hag an Aziiz evit pep a gandr disheñvel. Ar re zu a chom er gêr, hag int 73 % eus tud ar vro.

Perak ur votadeg ken a-bred neuze ? Pal Peter Botha a oa unvaniñ ar re wenn en dro d'fe bolitikerzh ha lakaat anezhe da sevel a-gevret ouzhañ war ar renad enep-demokratel. E soñj a oa diskar an tu-dehou pellañ ouzhpenn ha war se en deus c'hwitet war e daol.

Etre daou strollad enebour eo rannet an tu-dehou pellañ : an Herstigte Nasionale Party (H.M.P.) hag ar Conservative Party (C.P.). An disunvaniezh-se a lakae meur a-hini da grediñ e vefe bet splannoc'h trec'h Botha. Ar voterien n'o eus ket heuliet anezho avat ! Ma n'eus ket bet kalz a cheñchamantoù evit an N.P. e weler eo en em vodet voterien an tu-dehou pellañ en dro d'ar C.P. ha gouezet o deus sezioù nevez.

Ar Progressive Federal Party (P.F.P.) tuet gelloc'h gant ar cheñchamant a oa bet famallet dezhañ bezañ gwerzhet d'an A.N.C. (strollad ar re zu e-maez al lezenn). Berz en deus graet ar vrud-se e-touez ar re wenn ha kollet en deus tachenn.

"Ur gouarnamant eus an tu-dehou pellañ hon eus hiviziken" a zisklerie an Eskop Desmond Tutu an deiz war-lerc'h ar votadeg.

Anat eo evel just, ne vo ket adkroget gant an nebeud a reizhadennou enep an Apartheid bet dilezet 18 miz 'zo. Diskouezet o deus sklaer ar re wenn e savent a-enep dezho en ur vont pelloc'h war an tu-dehou.

Dou zevezh a-raok ar votadeg e oa aet Winnie MANDELA, greg ar politikour toullbac'het d'ober ur brezegenn e Skol Veur Witwatersrand. Un nebeut minutennoù diwezhatoc'h e tegouezhe ar bolised tokarnet da lakaat un termen d'ar c'henn-diviz. Deut e oa a-benn Winnie MANDELA da dec'hout dibistig sikouret gant un toullad studierien. Met 80 studier a oa bet dalc'het gant ar polis.

Un hanter eur goude-se e teue en-dro ar polis er Skol-Veur evit skrapañ skipailhoù tele div chadenn etrevroadel. Lesket e oa da vont ar gazetennieren un nebeut eurvezhoù war-lerc'h goude ma vije bet distrujet o filmoù ha kemeret o anvioù.

"Getu dres skeudenn Afrika ar C'hreisteiz an deiz hiriv" a zisklerie an Itron Mandela en ur gitaat ar Skol-Veur.

Evit 166 sez eus bet votet d'ar 6 a viz Mae, 12 sez a vo lakaet ouzhpenn a-genfeur gant niver ar mouezhoù a zo aet gant pep strollad.

Etre krochedoù e kaver niver ar sezioù a oa gant ar strolladoù a-raok ar votadeg.

STROLLAD BROADEL N.P.	123	(126)
CONSERVATIVE PARTY C.P. (tu-dehou pellañ)	22	(18)
PROGRESSIVE FEDERALE PARTY P.F.P.	19	(27)
STROLLAD AR REPUBLIK NEVEZ (kreiz)	1	(1)
TUD DISTAG	1	(1)
HERSTIGTE NASIONALE PARTY (HNP)	0	(1)

AFRIKA AR C'HREISTEIZ



Evit ar wech tout eo bet troet ur vinorelezh en arvar d'en em serriñ warni e-unan. Ha n'eus ket da vezañ souezhet.

let ur votadeg all o tremen dindan o daoulagad hag int dindan gazelge.

Breskoc'h eo renad ar re wenn evit na oa a-raok ar votadeg koulskoude. Digaset en deus da soñj d'ar bed-diavaez di-reizhder ar sistem ha kounnaretoc'h eo c'hoazh ar re zu o we-

o diskrogoù-labour hag o manifestadegoù a ziskoueze o nerzh koulskoude. War he diskar emañ ekonomiezh ar vro gwallgaset gant an harzoù-labour hag ar c'hastizoù etrevroadel.

HA MA VOTFE AR RE ZU ?



D'an deiz war-lerc'h votadeg ar re wenn eus bet embannet ur sondaj gant brasañ ke-laouenn ar re zu "SOWETAN".

Votiñ evit ur prezidant a oa bet kinniget dezho. Gant Nelson MANDELA eo aet ar maout 838 mouezh. Oliver TAMBO, prezidant an ANC a zeu en eil plas (743 mouezh). An eskob Desmond TUTU a c'houenze 691 mouezh.

Ar gumuniezh wenn zoken a zo dizunvan e-giz ne oa bet morse a-raok ha zoken ma c'hounez sezioù nevez gouarnamant Botha en deus c'hwitet war e daol...

War-wel eo bet lakaet holl gudennoù ar vro, krog eo ar re wenn d'en em zrailhañ e-treze e-giz ne oa bet morse gwelet...

Ar re wenn o deus votet evit netra neuze ? Ar c'heloù mat nemetañ eo e c'hellfe a-walc'h bezañ ar wech diwezhañ. Pep hini a c'hoario e roll betek penn an termen c'hwerv avat evel en un drajedienn glasel.

Yann Pennhalleg.

BRUDAN STOURM BREIZH

AR C'HEVRE KELTIEK

CELTIC



LEAGUE

Labourat a ra ar C'hevre Keltiek da vrudañ ar stourm e Breizh, hag hini DIJAN ivez. A-gevret gant niverenn 57 ar gelaouenn CARN ez eus bet kaset war dro 700 kartenn d'ar gouarnamant, dezho d'o c'has da Vaodiern an Deskadurezh c'hall e Pariz evit goulen digantañ paevez gant e eneberezh ouz ar skolioù brezhoneg.

Pennadoù digant Alan Heus-saff zo bet war an danvez-se ivez en "Irish Times" hag en "Irish Press" e saozneg, en Anois en iwerzhoneg. Kaoz zo bet ivez eus ar gudenn war Radio na Gweltz, hag atizet ar selaouerien da skrivañ d'ar Maodiern e Pariz. A-hend-all en deus goulenet ar C'hevre ouz pennaozerien kelc'helaouennoù evel "Europa Ethnica", "Ninman" (Kembreiz Amerika), Etnisao (Esperantourien) embann ar galv kenskoazell.

EUSKAREKAAT AR VRO

REDEK EVIT AR YEZH



Hevlene, evit ar 5vet bloavezh, e oa AEK oc'h aozañ ar redadeg KORRIKA, 2000 kilometrad dre hentou-7 rannbarzh Bro Euskadi e-pad 9 devezh, dizehañ, dezhañ ha noz. Loc'hañ a reas en Hendaita d'ar Gwener 5 a viz Ebrel da 19 eur, dindan ar glav, tremen a reas da hanternoz dre gêr Vaiona... hag echuñ a rae e Bilbo d'ar Sul 12 war-dro 14 eur.

Pal ar redadeg, ouzhpenn dastum arc'hant dre werzhañ d'ar berzhidi, d'ar briz a garront, ar c'hilometradoù a reont a zo brudañ an euskareg ha reiñ lañs d'an euskarekaat. Kevredigezhioù eveljust, a gemer perzh: pep ikastola, pep kreizenn koroll. Met er c'hreisteiz e vez gwelet ivez naered, kuzulioù an amnisteiz, ospitalioù, skinwel Euskadi, c'hoarierien gozh "Atletico Bilbao" o paeañ an enor da zougen ar vazh-test a vez kaset a-hed an hent dre ar vro.

Ouzhpenn 20 000 den a drezas kêr Vilbao o huchal "Korrika" ha luganoù all o c'houlenn ar frankiz evit ar brizonidi pe ar statud d'ar repuidi en Hanternoz. Er gouel a voe da heul e voe kan, somerezh, ha prezegennoù (berj) gant dileuridi a lies bro. Un ezel eus

SAB, goude kounañ ar repuidi o chom e Breizh hag an euskariz toull-bac'het e Maoned, a laras e oa ar stourm evit ar yezh ul lodenn eus ar stourm evit an dieubidigezh vroadel, en Euskadi evel e Breizh.

AN EUSKAREKAAT GANT AEK.

Evit kalz a Vretoned tost ouzhan Emsav emañ Euskadi bro ar stourm politikel kalet harpet gant un emskiant vroadel kreñv. Evit a re dostañ ouzhan DIMAN eo ivez bro Seaska, ar gevredigezh a zo bet skouer DIMAN evit he labour en Hanternoz. Kement-se avat, ne dle ket kuzhat al labour ramzel hag uhelbal ar stourmerien evit ar yezh er C'hreisteiz, ar re-mañ bodet en dro d'an ikastolak ha da AEK ivez.

AEK.

E1968 e oa savet ar gevrenn AEK (Alfabetatze Euskadunte Koordinakunde) gant Euskalzaindia, Akademiezh ar yezh, dezhi da bal deskiñ lenn ha skrivañ d'ar re na olient nemet komz, ha deskiñ

euskareg d'an holl re a felle dezhe deskiñ. Kregiñ a rae neuze al labour unvaniñ an holl Gau-Eskolak (skolioù-noz) er C'hreisteiz.

E 1979 e oa distag AEK eus an Akademiezh hag e 1980 ec'h unvane holl skolioù an Hanternoz. E 1983/84 e vode AEK 30 000 skoliad en Euskadi a-bezh. Hwlene, en Hanternoz, ez eus 900 skoliad e 23 a skolioù-noz, gant 110 a gelesnerien ha 5 den gopret.

Ur gevredigezh kelenn, "pedagogel" mar kirit, dibol-tikel eta, eo AEK.

EUSKAREKAAT

Adeuskarekaat Euskadi a-bezh eo pal AEK. 23 % a dud hepken a gomz euskarek, ret eo eta stummañ konzerien nevez buan-tre.

An izili eo a gas arc'hant da AEK, pa n'he deus ar gevredigezh nemet 1,5 % a yalc'hadoù digant ar c'huzulioù departamant pe rannvro. 150 lur e koust ar gartenn ezel. 100 lur o vont da AEK, ar peurrest o chom gant ar Gau-eskola. A-hend-all e pae ar skolidi 500 lur

evit ar bloavezh-skol. Ar bras eus an arc'hant a zeu eus an abadennoù savet gant an izili.

Pouezet e vez dreist-holl war ar yezh kozzet gant an deskerded ha krouet e vez un endro yezhel a roy tu d'an holl implij ar pezh a ouzont: dibennoù sizhun, abadennoù a-bep seurt.

Tost da 600 eurvezh-skol zo ezhomm evit deskiñ ur yezh. Neuze, ewe AEK, arabat chom da ruzañ e-pad 10 vloaz. Dibab a ra skolidi AEK strivañ kalz ur pennad berr eget mont goustad ha bezañ pell ganti : gant 3 eur ar sizhun e-pad bloaz e vo ezhomm 6 vloaz ! Gant 12 eur ar sizhun ez aer buanoc'h. Ouzhpenn-se e c'hall kelennerien bevañ diwar gelenn ar yezh.

HAG E BREIZH ?

Ha vo lakaet da uhelbal gant ar vrezhonegerien diorren ar yezh dre lie-saat niver ar gomzerien vras, ha n'eo ket hepken chom da c'hortoz e kresko bugaligoù Diwan, e vo savet ganimp, e-maez eus ar chapelioù, ar gevredigezh heñvel hon eus ezhomm anezhi a-benn kas hon yezh war-raok.

SEASKA

Emañ SEASKA o vont da sevel ur skoliad nevez evit he skolidi deuet da vezañ nive-ruz : 120 hiziv en EIL DEREZ, 300 a-benn 3 bloaz.

Nac'het he deus ar gevredigezh kinnig an iliz katolik a oa prest da reiñ dezhi skol gatolik Ustarriz... gant ma vefe an iliz o ren ar skol !

DEMOKRATED AR P.S.O.E.

Goulenn a ra PSOE Bro-Euskadi e vije divodet ar strollad broadelourien al lezenn ar gazetenn EGIN, da heul tarzhadennoù boutailhoù-tan taolet gant tud vasklet e ti ar Bobl e Portugalek, ma vo gloazet da heul 9 den ezel eus ar PSOE. Hervez ar PSOE eo nazied, eus ar seurt a vombez

UR SEVENADUR EN E VLEUNV

Gernika, tud Herri Batasuna, rak sur eo, eweoz, eo "ganto eo bet graet an taol".

GERNIKA 50 BLOAZ

1937 1987

E1937, 50 vloaz zo eta, e vombeze kirri-nij an Nazied kêriadenn Gernika, e rannbarzh Biskaias en Euskadi, evit kont ar jeneral Franco, o lazhañ miliadoù a dud dizifenn da zeiz ar marc'had. 7 ti diwar 10 a voe distrujet, pulluc'het e voe un ospital, pa ne voe ket tizhet al labouradeg armoù nemeti. Kaset e voe al lazhadeg da benn gant al Lejion "Condor" renet gant ar jeneral Hugo Von Sperrlen, a voe barnet d'ar marv e prosez Nuremberg, naren evit lazhadeg Gernika avat. E penn an argaderien e oa al le-tanant-koronal Von Richtofen a renas ar bombezedegoù a-enep Polka. Un ofisour all, Hans Asmus a zeuas da vezañ komandant aerlu an OTAN evit ar mor Baltek.

Pa gomzer eus Gernika e ankouaer bombezedegoù Bilbao ha Durango a c'hoarveze ivez pa dale arme Gudariak Euskadi ouzh lu ar faskourion. Un arouez eo deuet Gernika da vezañ e-barzh stourm Euskadi a-enep lazhadeg he fobl. "Le Pays basque, ça n'existe pas", a lare Prefed Pau e 1965. Ober a raint o seizh gwellañ da zistruj hon fobloù. Gernika ? Bemdez eo a ranker stourm ouzhan ar boblvun-treien.

ABERRI EGUNA

Da Sul Fask e vez lidet "Devezh ar Vro" en Euskadi. Daoust ma kredo kalz a Vretoned ne vez nemet unan eo meur a ouel e meur a lec'h a vez d'an deiz-se en Euskadi, hervez ar strolladoù politikel. E-vel-se ne oa nemet Herri Batasuna a c'halve an dud da vont da C'hernika hwlene. Gant Euskadiko Ezkerra e oa un nebeud kantadoù e Leioa (Biskaias) gant Petra Kelly, senedorez eus strollad ar Re C'hlas en Alamagn ha Gerd Bastian, bet jeneral en arme alaman. E-keit-se e oa ar PW o vodañ miliadoù a dud e Bilbo, hag Eusko Alkartasuna e Donosti. En Hanternoz e oa un nebeud kantadoù en Aberri Eguna Askaine.

Bretoned a oa e Gernika, aozet o beaj gant ur c'huzul Breizh-Euskadi eus Sant Nazer, tud eus UDB e gwirionez. Ha kemer a raint perzh e Devezh ar Vro e Breizh ?

GURE IRRATIA 89.6 F.M.

Eus 6 eur 30 da 8 eur noz ne glever nemet euskareg war ar skingomz-mañ eus Baiona a vez klevet er vro penna da benn ha betek en tu all d'an harzoù. 4 den a labour eviti, ha 200 den a roy ur skodenn vizek a 100 Lur.

Mark Kerrain.



KANAKIA

POAN SPERED EVIT B. PONS

NAC'HAN A RA AN

FLNKS. GWELET PONS

Desidet en deus an FLNKS nac'h kejañ gant Bernard PONS, ministr an DOM-TOM, e-pad e dro-Ganackia eus an 11 d'ar 15 a viz Mae ; en deus diskleriet burev politikel an Emsav evit an dieubidigezh vroadel. "Goulenn a ra etav an FLNKS ar c'hambreseg gant gouarnamant Gall a-benn studïañ an doareoù da lakaat pobl Kanackia da zivizout chom stag ouzh stad C'hall pe get ha n'eo ket evit komz eus ur statud a "emmenerezh", ur wech ouzhpenn o'hoazh". Kas a ra an FLNKS da soñj en doa goullet c'hoazh ur c'hembrezeger all e-get Bernard PONS "re untuek" hervezo. Mod all, Emsav Federal OPAD (broadelourien e-maez an FLNKS) en deus diskleriet ne gero ket perzh er referendom a vo dalc'het e fin miz Eost (sañset) e Kanackia.

Muioc'h eget biskoazh eo stanket an nor etre ar Frañsi-zien hag ar Ganaked. Ma ne vez ket cheñchet penn d'ar vazh, ne weler ket penaos e vo renket ar c'hudennoù du-hont, surtout pa gomañs ar vroadelourien daerañ da vezañ niverusoc'h niverusañ.

D.J.


REIN A RA BERNARD PONS ARC'HANT D'AN FLNKS.

E-pad e dro divezhañ e Kanackia e soñje mearvat Bernard PONS prenañ mouezhioù evit ar referendom. Roet en doa da bennoù meuriadoù zo, kalzig a arc'hant. Ar pezh ne ouie ket eo, eo bet kaset al lod vrasañ eus an arc'hant-se da gef an FLNKS gant pennoù ar meuriadoù.

Trugarekaat a ra an FLNKS ar Ministr brokus Bernard PONS.

D.J.

(diwar "B'WENANDO", kelaouenn Kanackia).



Jean Marie Djibau Penn Rener an FLNKS e-pad e dro e Breizh e miz Ebrel.

Lennit
al liamm

Kirivañ da : AL LIAMM
16, straed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Koumanant bloaz 120 kur (studierien, tud dilabour :100 kur)

PROFOU

Trugarez a laromp deoc'h lemmetien ger, evit ho profoù a gendalc'h da sont ingal, hag hor skoazell kalz da zere'hel ho kasetenn bev !

Profoù mis Meurzh ha mis Ebrel
Noel Peyr 80 l, J.B. Le Douff 80 l, Michel Briand 30 l, Luc le Reste 30 l, Yves Jardin 30 l, J.Y. Allain 80 l, Paul Le Meur 30 l, Michel Bertin 180 l, Y.E. Haspot 180 l, Robert Rannou 30 lur, Mikoel Treger 30 l, Snoeck 20 l, Lanig Jourden 30 l, Yann Bouessel du Bourg 30 l, Malo Bouessel 30 l, Nikol Gourmelon 30 l, Dominig Kerwegant 80 l, Herve Masson 580 l, Yves Caroff 80 l, Louis Cleac'h 30 l, Arnaud Viez 80 lur.

Degeteret hon eus en holl 1770L

O kenderc'hel ar bajenn 20

Trelat eo PASKMA gant ar seksualegezh, (hini ar re all), milionou a dud a zo sod gant o anevaled-ti, pe gant filmoù polis war an tele, ar C.R.S. ed a bled gant o vakañsoù -ur vamm-gozh a zo bet debret gant he c'hi, ar vugale a ra war-dro prof gouel ar mammoù... Hag e keit-se eo :

.darbet d'ur c'harr-nij ETENDARD kouezhañ war hor penn,
.kreizennoù MALVILLE ha PIERRELATTE war var da chom bout,

.skinobertantiz ouzhpenn a zo bet muzuliet e miz Meurzh en EUROPA a-bezh !

.en U.S.A. eo bet diskleriet e oa bet douaret kiloioù plutonium hag uranium e HAMFORD (eus 1944 betek 1969 !),

.474 miliard a lurioù o deus divizet ar gannaded postañ en arme dindan 5 bloaz.


Evel ma lare ma zud-kozh :
"In girum imus nocte et consumimur igni" (treiñ-distreiñ a reomp en noz ha mont da goll a ramp en tan).

GARAN AR MEUR

NUKLEEL

PEP HINI E ZOARE DA LIDAN

DEIZ HA BLOAZ TCHERNOBYL



O vanifestiñ da gefver an deiz-ha-bloaz - Hyde Park e Londrez



O lidañ an deiz -ha-bloaz e bered ar bomperien e Moskou

Ur bloavezh zo tremenet ha n'eo ket bet ankouet gwallzarvoud Tchernobyl . E keit ma 'z a war ziskar ar radioizotopoù tamm ha tamm ez eus bet cheñchet un dra benak e spered an europaned. 50 000 a dud e oant o vanifestiñ da gefver an deiz - ha bloaz e bro Italia. Ure mell kerzhaded a zo bet e bro Saoz, Glensy Kincock, gwreg penn strollad al labour a gase ar jeu en dro. E Bro Sweden, ar vro zo bet tapet ar fallañ gant ar c'houezhadenoù e klasker ar mod da serriñ 12 reaktor ar vro a-rack 2010 . N'eus nemet 50 % eus an alamaned a zo a-du evit dere'hel ar 21 kreizenn nukleel a zo en o bro. An holl a zo bet spontet gant an oon rak ar boued kontammet avat, e Bro C'hall n'eus ket anv da zistreiñ war ar poli-tikerezh en deus bet lakaet ar c'hreizennoù nukleel da broduiñ 70 % eus an tredan. Hervez ur sondaj graet evit Le Figaro ne vefe nemet 46 % eus an dud o vezañ a-du gant an nukleel koulskoude. Kement-se na vir ket ouzh kuzul Breizh da azgouenn ur greizenn nukleel evit Breizh. Gwir eo, n'eus nemedomp a vefe chomet dibistig da heul kouezhadennou TCHERNOBYL ! . . .

Y.P.

SKINWEL

GOUEL FILMOU INVERNESS

AR FILMOU PRIZIET

Er mia tremenet hon doa kinniget daoc'h un tañva eus ar pezh a oa bet e Gouel ar Filmou hag ar Fellisel er broioù keltiek.

E Inverness e oa bet dal-c'het eus ur 6 d'an 10 a viz Ebrel. Dont a rimp en-dro war ar gouel ar mia-mañ evit kinnig daoc'h an 10 film bet prizieta en Inverness.



A winter story

AR GENSTRIVADEG

"Naming the Names" Priz ar filmoù bras. Fennala, ur plac'h ouzhpenn 30 bloaz, a ve e Belfast ha labourat a ra en stal levrioù. Anaoudegezh a ra aze gant Kirk, kalz yaouankoc'h egeti, mab ur barner protestant bet desavet en ur "Public School". Klask a ra ar paotr levrioù diwar-benn Istor Bro Iwerzhon...

Film saoz savet gant Stuart Burge ha graet gant BBC Pebble Linn - 86 mn - e saozneg -

"Tree of liberty" Priz ar c'hel-filmoù (documentaire). Serge Hovey, ur sonaozour nammet en deus graet enklaskoù war Burns hag e ganaouennoù. Roet e vez un tañva eus e oberennoù gant Hovey hag ur ganerez : Seawrey Path.

Film skos savet gant Timothy Neat ha graet gant Everallin Film - 74 mn - e saozneg.

"A winter story" Priz ar filmoù evit ar vugale.

Ar film tresadenn bev-mañ a gont istor al Louarn en deus lakaet en e benn laerezh yar-indez Nedeleg ur c'houer...

Tu a vo marteze da welet anezhañ e Breizh un deiz bennak. Sonj a c'hellfe kaout tud FR3 Breizh premañ anezhañ evit an abadennoù brezhonek.

Film skeudennoù bev kembreat savet gant Dave Edwards ha graet gant Siriol Animation Limited - 22 mn - E saozneg hag e kembraeg.

"Aids" Priz an abadennoù kelaouin. "Aids" a zo un tamm eus "Y ved ar Bedwar" diwar-benn ar SIDA. Kinniget e vez ur pennad-kaoz gant un den klañv (gant ar Sida). Goude se ez eus un diviz etre ur mezeg, un heñvelreviad hag ur c'huzulier war ar medisinerezh. Respont a reont ivez da goulennnoù ar sellerien tele.

Film kembreat graet gant HTV-45 mn - e kembraeg.

"Migration" Priz Video Sony - Ar film-se a gont buhez ur blesnier karr-nij war e leve hag ur falc'hun a oa gwehall en ur vandenn labourad o tiwall un aerborzh. Talvoudegezh ar film a zo implij ar skeudennoù sintezenn evit ur film faltazi (an hini nemetañ er bed). Savet eo bet gant Studio skeudennoù niverel FR3 Roazon.

Film Breizhat graet gant FR3 Breizh hag ar CCETT. 16 mn - e galleg.

"Heaventy Persents" Priz film Edwards.

Emeur o klask ur burzhud e skollaj ar "Gwendigez Edith Sample" e Glasgow. Ur burzhud he doa graet e 1917. Klasket e vez neuze an daou all evit ma vije lakaet da santez.

Ur c'helenner nemetken, Vic Matthews, ne gred ket en traoù-se, n'eus nemet burzhudoù bihan ar vuhez bendeziek evitañ. Klask a ra kentoc'h mont gant ur gelenner koant tre ha katolik, Ruth Chancellor. Met ne gred ket d'ar burzhudoù gant ur "B" bras.

Film skosat savet gant Charles Gormley ha graet gant Michael Relph Associates - e saozneg.

"Down Home" Priz Filmoù sonerezh.

Ur film diwar-benn sonerien "Cape Breton" (Bro Ganada) o tennañ o orin eus ar skosiz hag Indianed Micmac. Levezon an Uheldiroù skosat hag Iwerzhon a gaver c'hoazh en o muzik.

Film skosat savet gant Mike Alexander ha graet gant Pelicula Film Glasgow - 51 mn - e saozneg.

"Clash of the Ash" Priz an oberen gentañ.

Phill Kelly, ur skoliad fall a-walc'h e labour er skol a zo o vont da guitaat ar skol hep gout re vat ar pezh a ray. Adkavout a ra ur mignon en doa graet ar memestra bloavezhioù zo. Dilabour eo hag e klask

BERZH BRO SKOS

gwelet sklaeroc'h en dazont, e foñs banneoù bier !

Film Iwerzhonat savet gant Ferguson Tighe ha graet gant Circus Film - 51 mn - e saozneg.

"There is a Happy Land" priz sperd ar gouel.

"There is a Happy Land" a zo ur c'helfilm dister adarre a gont istor bro Skos gant kanaouennoù eus unvaniezh bro Skos da vro Saos ha Dispac'h ar Jacobites

o tremen dre emgann Culloden.

Film skosat savet gant John McGrath ha graet gant Freewart Film. 90 mn - e saozneg.

"Northern Front" Priz ispisial ar varnerien.

Film skosat savet gant David Holliday ha graet gant Film Workshop Trust Edinbourg. 59 mn E saozneg hag e gouezeleg bro Skos.

D. ar Gevel.

BERR HA BERR

GOUEL BRO ROAZON D'AR SADORN 23/05

Unvaniezh kevredigezhioù breizhek bro Roazon ho ped da zont plasenn an ti-kêr, e Roazon, d'ar Sadorn 23 a viz Mae, adalek 2 eur goude kreisteiz. Abadennoù sonerezh, kan, dañs, standoù levrioù, artizanelezh hag all... a vo a-hed an enderezh. Ha FEST NOZ VRAS war ar blasenn gant gwellañ sonerien, kanerien, strolladoù ar vro eus 9 eur noz betek... ar gouloù deiz...

ROSKO E 1989

Choazet eo bet ROSKOV evit Gouel 1989. Un teuliad difennet gant Maer Roskov, Michel Morvan, a oa deut e Inverness evit-se. Skoazellet eo bet goullenn ti-kêr Roskov gant ar c'huzul Rannvro ha Kuzul Departamant Penn ar Bed. A-benn 1989 e vo savet gant FR3 an abaden kentañ skignet e Keltavision : da laret eo un eurvezh tele a vo tu da welet er bed keltiek abezh.

Anv zo da sevel ur chadenn skinwel a vo skignet war ar pemp departamant. E penn ar jeu e kaver anvioù E-douard Leclerc ha Vincent Bolloré a zo o paouez dont da vezañ unan eus kenlodeien pouezusañ Embannadurioù an Daol Grenn (Ed.de la Table Ronde). Breur kaer ministr ar PPP eo eñ a-hent-all.

Kroget o deus un emglev gant ar Pempvet chadenn a zo kabestret gant an Aotrou Hersant. Abadennoù TELE BRETAGNE a c'hellfe kregiñ a-benn an Diskar Amzer.

An Emsav a zo pell c'hoazh da sevel ur skinwel. Na pa vefe ken evit Radio ALTER-NANTES a vo krouet a-benn nebeut gant ar C.U.A.B. hag an e-kolojisted ez eus poan o kavout brezhonegerien da ober war-dro an abadennoù en o yezh. Titouroù : 40-63.35.66.

Sevel a ra UNVANIEZH AR GELENNERIEN BREZHONEG a-enep an diarbennnoù kemeret gant Renerien FR3 a-enep an abadennoù brezhonek. Goulenn a ra ma vo lakaet un hanter-eur keleier brezhonek bewdez ha div abaden all ouzhpenn e-kerz ar sizhun da gentañ. Embann a ra eo ur chadenn skinwel hollvrezhonek ar pal da dizhout.



K.S. MONTAGNE

FILM

THE CHILDREN OF A LESSER GOD

LES ENFANTS DU SILENCE

PRIZ OSCAR 1986



Trec'h an dilavar ? Aze emañ ar c'henn ! Anavezet eo William Hurt dreist-holl evit e roll dispar e "les baisers de la femme-araignée" en doa talvezet dezhañ prizioù e Cannes hag e Hollywood, hogen kalz ampartoc'h eo e "Les enfants du silence" peogwir eo disi en e c'hoari-film e-lec'h ma vesk ar gomz hag ar sin en e aes.

ISTOR

James LEEDS, kelenner ortofonist donezonet-kaer oc'h erruout er "Governor Kittiridge" -skol ar re vouzar hag ar re fallglev- "Amazñ ne glaskomp ket komzañ ar bezh" a lavar rener ar skol-se o tegener anezhañ. Ne oa ket ali gantañ : e zoareoù pedagogel divoaz a laka ar rener da gounnariñ. Plijout a reont d'ar studierien avat ha diskouez a reont buan bezañ e-fedus.

Ober anaoudegezh a ra gant ar goantenn Sarah NORMAN bet studierez, bouzar ha kevrenn an tamm anezhi. Santout a ra diouzto eo dedennet ganti. Sarah, avat, n'eo ket prest da zegemer kement all, hogen ne bado ket pell... Disoc'hañ a ra pennegezh Sarah war ar garantez o tont etreze.

Sed petra oa spi an aoze-rez diouz ar pezh a lavare pa oa bet roet dezhi an oskar : "Ar film-se a zeu da stankañ un tamm eus an islonk a zo atre kultur ar re vouzar hag ar re a glev".

E.T.

Film amerikan gant Randa Hainer, senario gant Hesper Anderson ha Mark Hedoff hervez pezh-c'hoari Mark Medoff.

Tro hoc'h eus bet da glevet komz eus "Les enfants du silence" (Children of a lesser god) aet gantañ pemp menez da nebeutañ da heul listenn ar re anvet e Hollywood. Ur c'hoarierrez yaouank war he zaol-arnod a oa : Sarah NORMAN (Marle Matlin, 21 bloaz, bouzar abaoe an oad a driec'h miz, ur gwir arouez evit he c'hoari dispar) Ne oa ket kozh-kozh ar film-se ma ne fazian ket. Graet eo bet avat er bloavezhioù 80. Deut eo er-maez war ar skramm bras gant Paramount e Bro-C'hall nevezig 'zo...evit an holl dud, ar re a glev hag ar re vouzar, e yezh ar sinoù war un dro gant ar gomz ez eo. Ur film bev, e-fedus ha burzhodus eo diwarbenn istor

ar garantez, etre ur plac'h vouzar hag ur c'helenner-ortofonist a glev lakaet da c'hoarier e metoù ar re vouzar ha fall-glev. Ar pezh-mantrus-mañ, a zo bet c'hoarier gant James LEEDS (William Hurt) ha Sarah NORMAN o resev un degemer entanet a-berzh ar filmvouriezh hag an holl.



STAJOU

VAKANSOU PLIJUS

STAJ E OALD DIWAN



Kinnig oberiantizoù da vugale a oar brezhoneg, setu eta ar pezh he deus klas-ket ober OALD TREGLOUOU abaoe ar penn kentañ. Met arabat ankounac'haat, ma ya war greskiñ niver ar vugale a heul kentelioù brezhonek pe a vez desavet en hor yezh, ez eus e Breizh miliadoù a vugale, siwazh, n'o deus ket an degouezh da gaout kesent-all.

Setu perak eo deut ar soñj deomp aozañ ur greizenn e-vit bugale divrezhonek (e-giz ma veze graet gant Ar Falz un nebeut bloavezhioù zo c'hoazh).

E-pad eil sizhunvezh vakañsoù miz Ebrel eo bet dalc'het ar greizenn-se e Treglouou. Bez e oa 19 bugel o tont deus Breizh a-bezh (en o zouez 2 o doa divizet o-unan dont).

Evit un hanter anezho e oa an darempred kentañ gant ar brezhoneg, ar re all o doa c'hoarezed pe breudeur e DIWAN.

PAL A GREIZENN

Pal ar greizenn a oa reiñ dezho un tañva eus yezh ha sevenadur Breizh ha lakaat anezho da zizolein o finvidigezh.

Bendeiz e veze dibabet un danvez evit labourat warnañ, ar

boued, al loened, an ti... da skouer.

Diouzh ar mintin e veze graet un doare kentel e-pad un eurvezh, lec'h e teske ar vugale gerioù pennañ danvez an devezh. Desket e veze ivez ur ganaouenn.

Goude merenn e veze graet kentoc'h traoù en diavaez, liammet avat gant an "tem" (pournadennoù evit dastum traoù pe anvioù-lec'h, mont war bone, c'hoarioù diabarzh...).

Ouzhpenn eo bet prientat gant pep animatour hag e skipailh un abadenmig hag a zo bet c'hoarier dirak tud ar vugale an devezh diwezhañ (ur savadenn diapo diwar ur goñchenn, ur pezh c'hoari ha jestroù). 'Giz ma welit eo bet fonus a-walc'h an traoù ! A-wechoù, zoken hon eus bet aon e vije re start evito, e vakañsoù e oant maestra, met a-benn ar fin int-i eo a c'houlenne atav muioc'h-mui.

Kalonekaüs eo gwelet bugale ken dedennet ! M'hon eus tizhet hor pal eo peogwir e oa un niver bihan a vugale (gant 50 bugel n'eus ket tu da gas da benn seurt labour). A-bouez eo ivez kaout animatourien o doa kalzig a skiant-prenet. (Poent bras eo stummañ animatourien yaouank, n'eo ket al labour a vank...).

Ret eo ivez trugarekaat an heol; biskoazh c'hoazh n'hon eus bet un amzer ken splann e TREGLOUOU da vare Pask !

Gant ar berzh he deus graet ar greizenn e c'hellomp lavaret diouzto e vo aozet unan all ar bloaz a zeu.

Erwann DENEZ
Rener ar greizenn.

KEMBRE BREIZH

Muioc'h-mui e teu da vezañ dedennet ar Gembreiz gant yezh ha sevenadur Breizh hag ar Vretoned gant yezh ha sevenadur Bro Gembre.

Un dra vat eo e gwirionez kaout darempredoù etre an div vro evit dont a-benn da gompren gwelloc'h petra eo hor personelezh sevenadurel, da belec'h ez a hor stoura ha perak eo ken heñvel ha ken disheñvel war un dro, stad an traoù e Kembre hag e Breizh.

Evit an abegoù-se e vo kinniget e "Canolfan laith Nant Gwrtheyrn" Bro Gembre eus ar 26 a viz Gouere betek ar 1añ a viz Eost ur sizhunvezh a-raok an "Eisteddfod Genedlaethol" e kêr Porthmadog, ur staj digor d'an holl gembraegerien ha d'an holl vrezhonegerien dedennet gant yezh ha sevenadur hon div vro.

Kentelioù brezhoneg ha kembraeg a vo, hervez live ar stajidi, hag e vo aozet pournadennoù, gweladennoù hag all ivez er vro tro-dro. Ar stajidi a vo lojet e "Canolfan laith Nant Gwrtheyrn". Linselioù a vo e tiez ar greizenn.

D'ar Sul da 6 eur an noz e krogo ar staj a bado betek ar Sadorn goude pred kreisteiz. Amzer a vo war-lerc'h da vont da gêr Porthmadog evit devezh kentañ an Eisteddfod.

Priz ar staj a vo en holl : £70.00 (lur saoz).

Titouroù digant an aotrou Llaorañs John, 8, clos Wellfield, Llandello - Ferwallt - ABERTAME SA3 3EP - Gorllewin Morgannwg CYMRU / Bro Gembre.

DUDI

SERVAT E AMZER'ZO

TOULAN KAOZ EN DRO D'UR BANNE



En noz all e oa deuet Jili SERVAT e "AMZER ZO", ti brezhonegerien Roazon, evit komz diwar-benn e lev'r kentañ, "ARCTURUS" e anv. Un toullad tud dedennet a oa deuet ivez evit selou outañ. Etre ugent ha tregont marteze.

Ar goulenñ kentañ a voe diwar-benn anv al lev'r e-unan: perak "Arcturus"? Daoust ha ne vefe ket an anv-se, divoaz a-walc'h, ur c'hoari-ger ezoterek ijinet gant an oberour, e sell kuzhat (pe diskouez?) anv ar roue Arzhur dindan ur ger ben-nak all.

Da c'houde ez eus bet ur bern goulennoù all, e brezhoneg hag e galleg, ha desket eo bet ganeomp holl ur bern traoù diwar-benn an oberour koulz ha diwar-benn an oberenn hec'h-unan, leun-chouk gant daveoù d'ar sevenadur keltiek, en deus bet rankek studiañ pizh enta evit dont a-benn anezhi.

N'eo ket bet fellet dezhañ sevel ul lev'r diouzh ar c'hiz gant ur c'homiser e gorn-butan Sant-klaod hag ur c'hast

bennak a vije bet mac'hagnet gant ur pederjé pich-kaoc'h, pe neuze gant ur c'habluz all toctoc'h ouzhar bobl evel ur pesktaer breizhat kar e vanne da skouer. Tamm ebet!

Dibabet eo bet an danvez keltiek gant Jili Servat evit tec'hout er maez end-seun eus poullou-rod ar zivlization ofisiel hag he zachennoù-awen treut-ki a vezer rediet da ober ganto c'hoazh en abeg da levezoniou poumner ar chadennoù te-le. N'eo ket bet fellet dezhañ kennebeut all skein e roued ar geltiegourion gozh, he-mat c'hoazh, evel Gwenc'hlan ar Skouezeg pe Jean Markal(eu) pergen. Morse n'eo bet pal Jili


SERVAT sevel danvez-kelenn da vout lennet a-zevri gant emsaverien brederiet pe brederietoc'h, e-sell kemm dremmel an hollved. Tamm ebet c'hoazh!

Oberour "Arcturus" a zo un den eun ha tener, ha dreist-holl "didouell-kaer". N'eo ket gallgar ha n'eo ket brizh-keltiegour. N'eo ket un emsaver-emsaver. Pa sav Jili SERVAT ez eo evit ober un dra bennak.

Gouzañvet en deus bet. Kaset d'an aluzen. Ha koulskoude e lavar e-unan ez eo jentil an dud! Ur gwir vreizhad evel ma welit... N'eo ket neuze "Arcturus" un dezenn diwar-benn ho puhez, an hini bet c'hwitet ganeoc'h, da heul prezeg republikan tud a-ouenn gant Raimbaud, Beaudelaire, Mallarmé hag all.. En-emp d'an holl re varv-se n'eus ket bet roet tro dezhañ da vont pell gant e studioù - gwelet hon eus perak tuchantik-ar pezh ne lavar tamm ebet n'eo ket gouest da drevelliñ evel pep den ganet, ha c'hoant en deus bet neuze da sevel un diduamant "dishevel" da vezañ lennet dibreder.

Poent-mall evit klozañ trugarekaat burev "Amzer 'zo" da vezañ barrek da ginnig deomp abadennoù ken dudius. Fiziñs am eus e teuo ur mare ma vo pedet tud a-vicher da zont di evit komz e brezhoneg eus dazont ekonomikel ar vro: an tellou ermaeziet, ar gwirioù e-barziet, ar rak hag ar perak eus kement-se...

Illitch Bourevitch.



DEVEZHIOU-STUDI

AL LENNEGEZH VREZHONEK A-VREMAN

6/7/8 A VIZ EVEN 1987



Bodañ skrivagnerien, embannerien ha lennerien, en em soñjal war al lennegezh vrezhonek a-vremañ hag he dazont eo pal an devezhiou-studi-se.

An danvez anezho a vo selao prezegennoù, kemer perzh en divizoù a heulio anezho hag er breutadeg a glozo an devezhiou-studi d'al Lun goude merrn, hag ivez keñañ gant ar skrivagnerien hag an embannerien ha prenañ al levrioù kin-niget ganto.

Kregiñ a raio an abadennoù d'ar Sadorn 6 da 2 eur goude merrn hag echuiñ a raint d'al Lun 8 e-tro pemp eur. Gellout a c'hellor heuliañ an devezhiou-studi en o hed pe kemer perzh en ul lodenn anezho nemetken.

Tud a vo war al lec'h evit ober war-dro bugale ar berzhidi.

ROLL AR PREZEGENNOU

Disadorn 6 a viz Even : AL LENNEGEZH EVIT AR VUGALE.

Istor al lennegezh vrezhonek evit ar vugale. Hentoù nevez al lennegezh evit ar vugale en Europa. Skouer un nebeut broioù bihan (Kembre, Katalonia).

Skrivañ evit ar vugale : skiant prenet un nebeut skrivagnerien vrezhonek (romantoù, bandennoù-treset).

9 eur noz : filmoù savet diwar danevelloù. Diviz war an doare da sevel anezho.

Disul 7 a viz Even : AL LENNEGEZH VREZHONEK A-VREMAN.

adalek 9 eur 30 mintin : al lennegezh testiñ (buhezskridoù, enklaskoù), ar c'hoariva, al lennegezh ijin, ar varzhoniezh.

9 eur noz : beilhaded (barzhonegoù, kanouennoù, kontadennoù)

Dilun 8 a viz Even : AL LENNEGEZH VREZHONEK HAG AN EMBANN.

Adalek 9 eur 30 mintin : an tiez-embann brezhonek, ar c'he-laouennoù lennegel, ar skrid-varnerezh.

2 eur g.k. : kaoz digor war dazont al lennegezh vrezhonek gant skrivagnerien. Kudennoù lennegel ha yezhel ar skrivagner en ur gevredigezh c'hallek

3e30 g.k. : foar al levrioù gant embannerien ha skrivagnerien.

Evit kaout titouroù skrivit pe bellgomzit da : OALED DIWAN - Treglonoù - 29214 Lanniliz -

98.04.07.04.

BREMAN NIVERENN 68
MIZ MAE 1987

TAOLENN

Lizhiri	2
Manifestadeg Etrevroadel	3/4
Diwan	5
Jak Macarthur	6/7
Bretoned e Kat lonia	7
Ur votadeg evit netra	8/9
Euskadi	10/11
FLNKS	12
Deiz ha bloaz Tchernobyl	13
Gouel ar filmoù Inverness	14/15
BERR HA BERR	15
Sinema - film nevez	16
Oaled Treglonoù	17
Kembre/Breizh	17
Gilles Servat e Amzer zo	18
Studi war al lennegezh	19
MESK DIVESK	20

ar vaketenn gant Jil Killever, Doming Jolivet, Lena Louarn, Mikael Baudu, Rens Gastinger, Nolwenn Louarn.

Ar pennoù gant L. ar Bleiz, D.J., Diwan, J.K., Yann Pennhaleg, Mark Kerrain, Garan ar Meur, D. ar Gevel, E.T., Erwann Denez, Illitch Bourevitch, Bremañ

Luc'hskudennoù gant Le Telegramme, Reuter, Enbata, Egin, Bremañ, Time.


Tresadennoù gant Yves Montaigne ha Jean Paul Melhouet.

Rener Bremañ : Mikael BAUDU.

Komanant bloaz : 120 lur (150 L evit an estren-stadskoazell adalek 150 lur.

MOULET E TI OSCR
D35043 ROAZON

diwallit ! DIWALLIT ! diwallit ! skrivit e-barzh BREMAN : evit niverenn miz Even, kasit ho pennoù, keleier ho pro, kenenna-dennoù, luc'hskudennoù a-rak al Lun 8 a viz EVEN, da v-BREMAN 8, ru Hoche - 35000 - ROAZON -



MESK DIVESK

GARAN AR MEUR

Digoret eo bet "diskouezhadeg euzhus" PASKWA e Paris : 142 luc'hskeudenn ha tresadenn tennet eus kasettennoù (n'emañ ket BREMAN en o zouez, a c'hras Doue). Ur sexshop eus ar re vrasañ.

Met, n'eo ket dalc'hmat war dachenn ar reizh hag ar revr e vez izelaet ha gwalgaset an denezh gant ar c'helaouennoù pe ar bruderezh. Sellit ouzh ar skeudenn-mañ, tennet nevezig 'zo e Brest :



Ur vezh eo dija gwelout bruderezh evit bouestoù-mir boued loened doñv (chas-madam, marmouzed, kizhier, bugale hag all,) pa soñjer ouzh an holl dud marnaoniet er bed a-bezh ! Met piv en defe kredet ouzhpenn e oa krennarzed an danvez anezhañ ? Petra 'ra PASKWA ?

ESant Ke Pontrev eo bet dalc'het e dibenn miz Ebrel kendalc'h A.N.A.S. (Association Nationale d'Action Sociale) ar Polis Broadel evit Kornog Bro Frañs. Gant ar gevredigezh-se (3500 ezel en departamant 22 !) e vez meret ur pemzek bennak a greizennoù vakañsoù pe dachenoù-kampiñ.

Diskleriet en deus an Ao. MORICELY, Prezidant bras, e oa poent digeriñ ar savadurioù-se da dud ar vro "kerkoulz ar re gozh hag ar re yaouank (...), ret eo deomp dilezel anien ar berc'hentiez" emezañ.

Mont da vakañsiñ gant C.R.S.ed ? Nann trugarez ! Chomit en ho kreizennoù hag ar pellañ 'gwellañ !

Ur c'hoktail nevez a vez servijet en ostalerioù Belgia, dreist-holl e kostez Zeebrugge, abaoe miz Meurzh : Ur c'hart gant ur c'harr-ferry, ar peurrest gant dour-mor...

TF1, A2, FR3, 5*, M6, TV ROAZON, N5, RTL, Sky Channel, Z.D.F., Canal +, Canal J, R.A.I., TMC. Setu aze ar chadennoù a vez resevet e daou garter eus Roazon abaoe miz Meurzh 87, gant ar re a zo prest da baeañ 130 lur bep miz. Hag ouzhpenn ar chadennoù-se, e c'heller gwelout an holl skeudennoù e karezennoù bihan war ar skramm asambles !

Brasoc'h an dibab, brasoc'h ar frankiz, eme Mitterand hag an Eil-vaer da vare an digoradur. Emaomp o soñj staliañ ar skinwel er c'hirri-boutin, a lavar ouzhpenn an ti-kêr (evel er metro sur mat pe evel e staliou 'zo). Pemzek skramm ha pemzek uhelgomzer a vo e pep bus emichañs, pe neuze pelec'h e vo an dibab hag ar frankiz gant an arvesterien ?

Ur wech e oa un den kozh hag e wreg o vevañ en ur straed pinvidik e kreiz-kêr ur gêr a-Vreizh. Met an dud ne oant ket bet gwall lugernus o flanedenn : krakveañ a raent diwar o retred bihan ha gwelloc'h e oa dezho lonkañ ar banne gwin eget chaokaat ur steak kig pe soja. Anavezet e oant er c'harter dreist holl abalamour d'o chas, tri anezho a gustume harzhal...

E miz Ebrel eo bet galvet ar polis war o zro gant un amezeg pe gant o merc'h ; poent bras e oa : 30 kilo nemetken a boueze an hini gozh, goulioù abep seurt war he c'horf, krog e oa ar chas da lipat ha da gregiñ enno...

N'eo ket tennet an istor eus ur film sponterezh, c'hoarvezet eo e ROAZON e miz Ebrel!!

Emañ Gouel ar Mammoù e dibenn miz Mae, bet savet gant PETAIN ha gouarnamant VICHY. Setu amañ un tamm eus prezegenn ar Marechal kozh diskleriet d'ar 25 a viz Mae 1941 :

"Emañ ar Frañs oc'h enoriñ ar familh hiriv, ar mammoù a zo da vezañ enoret da gentañ-penn, avat. A-raok ar Stad, emaoe c'h-hwi, Mammoù ar Vro, desavevezed gwirion ar remziadoù nevez. Ganeoc'h e vez lennet d'an holl plijadur al labour, talvoudegezh ar sentidigezh, an welded hag an doujañs a zivian diouto an den nerzhus hag ar pobloù kreñv. Emaoc'h-c'hwi andon hor sevenadurezh kristen !!!"

D'ar Yaou 31 a viz Ebrel, da 10 e10 noz eo bet kuitaet e strollad gant ur c'harr-nij SUPER-ETENDARD, blienet gant an Ao. Le SCANFF (27 bloaz eus Santeg), ha kouezhet dreist-mell e Mor Breizh. Echu evitañ an droiad boaz e kreiz an noz. D'ar Gwener zo bet klask warlerc'h ar vagig-sikour war ar mor. En aner.

Ur fuzenn Exocet a oa staget ouzh ar c'harr-nij-se. Ha dizale e vo douget bep a fuzenn nukleel ganto. D'ar marese, pa gouezho unan anezho war Landerne, Landi, Brest pe Keraez, marteze ne vo ket "disoñjet" gant Ouest-France, Le Telegramme, Libe, Le Monde hag all da sevel un titl bras war o fajern gentañ gant ar c'heloù, 'a 'z eus anezho c'hoazh...

Da vezañ kendalc'het er bajenn 12.

